

(f. 163)

Charivari Mari Kiger.

Na sillavit hag e klefot hag he klefot kannan
eur chanson a zo kompozet a neve erid ar bloa
Zo gret d'eun intañvez iaouank a ia breman da zimisi
Abalamour dan draze kriomp charivari.

An intañvez man lavare eun dervez goude koan
ma ne allay kaout per ar goas guen me a kollo kalz a poan.
Rag enez a zo eun den lest hag ennez a plich din,
A balamour d'an dra ze kriomp charivari.

An intañvez man lavare eun droad en tal al len
Nag el leal plac'h ar marek me am bo per ar goas guen
Rag ennes a zo eun den lest hag ennes a plich din.
A balamour d'an draze kriomp charivari.

An intañvez man lavare en Penele pa errue:
- Debonjour dec'h ma faeron Setu me deud adare
Nag erid goulen konjes diganec'h da zimisi
A balamour dan dra ze kriomp charivari.

(f. 164)

2 An intañvez man lavare pa voa e vond e mez ar fers
Pa meus bet konjez va faeron a breman me ne ran forç.
Pa meus bed konjez va faeron a breman da zimizii,
A balamour d'an dra ze kriomp charivari.

1 An otrou Penele a lavare a neuze de filioez
Nag el leal va filioez goël e dec'h mond var ho poës
Rag eur vech all e voar bed c'hoas o poa bed var ho fri
A balamour dan dra ze kriomp charivari.

An intañves man lavare eun de de plac'h iaouane
An dud a lavar dime per ar goasguen nen deo ket koant
mes ennez zo eun den lest hag ennes a plich din
A balamour dan dra ze kriomp charivari.

112

Ar intañvez man lavare e dont deus plass al lez
 Nag el leal plac'h ar Marek m'em'bo eun habid neverz
 ket en deus eun davancher tafftas eun habit silezi
 A balamour dan dra ze kriomp charivari.

Ar ça ta Mari Kiger, me ho ped hag humblamant
 Da kommer ar sourei ag ar vaneamant
 Ne kredan ket e veffe mestres ne medoc'h en ti
 A balamour dan dra ze kriomp charivari.

(f° 165)

Ar ça ta Mari Kiger a me o ped ive
 Da kemeret ar souci dimeus ar vugale
 Diou vinores a kret din a zo ebars en ti
 A balamour dan dra ze kriomp charivari.

A c'houi va bugaligou a deuis goude se
 Da eva peb a vanac'h da iechet ho mouereb neve
 A c'houi per ar Goas quen a Mari ar Kiger
 A effot peb a banac'h da iechet o tud neve.

—
 7

Jannet Puill, Klasgeres a henrik 13 gwenver 1851.